

## Græet gant Per AR YANN, var eur Maleur arruet e Quemper-Corantin, da Sul ar Baçzion.

678 B

Var ton : **Pevar Den a barrès Pluffur.**

21

Deoc'h-u eta, Guerc'hes Vari,  
E teuan den n'em recommandi :  
D'am Eal mad a d'ar Spered Santel,  
Da rei dign sclerigen hep appel.

Mar tisclerjign e ber amser  
Ar malheur so erruet en Quemper :  
Quement à glovo e c'hana  
A dleffe e oad donned da yenia.

Clevet oc'heus comps a valeurio  
Cals a dud drezenni ho deus souffret ar maro ;  
Mæs evel quent ar c'hruella poan  
E tevi e beo e creïs an tan.

An autrou sant Loranç biniguet,  
Hennes a ouffe deoc'h lavaret  
Peugen cruel eo ar poanion  
Ho tevit e beo e creïs ar flammou.

Deiz evit deiz da nôs sul ar Baçzion,  
Are-me ha voa joaüs a galon ;  
Allas ! na sonje hini a ne  
Evije hirroc'h an nôs evit o bue.

Prest goude an unecq eür  
E voa commancet ar maleur,  
E maint ho tevi e creïs an tan  
Quercouls ar bras evel ar bian.

Allas ! ma bugaie, emezi,  
E creiz an tan red eo devi  
Hep na galloud en em souten  
Na caout sicour digant den.

Eur soudard e voa oc'h ober faccion  
E quichen dor ar prison,  
Ha pan deveus guelel an tan goal  
Eo bet commancet Ja grial :

An hep so cousquet dihunet,  
Car ar malheur a so presset  
Dremp da zicour ho da souten :  
Mæs, allas ! n'eus quet a voyen.

Pa voant eat e penn an ty  
E clevjont ar c'hlem hac ar c'hry  
Gant ar vugale hac ar vamm  
Ho tevi e creïs an tan flamm.

An tocqsin hac an taboulin  
A sonne e Quemper-Corantin  
Da avertissa ar bomperyen,  
Car ar malheur a so certain.

Dont a rezont bras a bian,  
En eur gryal : dan tan, dan tan !  
Hini a bed na boultrone  
Evit mont e danger he vue.

An escop hac ar velepen,  
Ar freret hac ar scleriyen,  
Tuc'hentil ha payzantet  
Tout e maint oll o redet.

Ar soudardet, ar gard national,  
Tout e redont a ract l  
Ma vije moyen var boës sicour  
E vije obtenet dezo recur.

Ar gendarmet, an archeryen poulicz,  
Ar c'homiczet a re liçz.  
Da zerc'hel dour dar bomperyen  
Da dauler var nein an doën.

Allas ! ma c'halon a vancq dign,  
Va goad em goaziet a teu da frimi  
Pa songean n'oc'h eus clevet netra  
Evel ma lavarinn deoc'h brema.

Pa glevas ar vamm e bugaligou  
O crial e creïs ar flammou,  
A rea muyoc'h a boan dezi  
Evit ma rea an tan eus e devi.

Credet hardiz va foannio zo bras,  
Ar c'hiçq oar va æsquern zo dija poas,  
Ha c'hoas e carf n'ambbe da souffri  
Poannion va bugale gant va hini.

E map oaged a drivoac'h vloa  
Gant eur gourach eus ar vrassa  
En nem laosq dan traon eus an eil estach ;  
Credit e hesquernigou a stracas.

Eur c'hostez anezan a voa grillet  
Hac e galon a voa mantret,  
C'hoaz e zave ene zao he-unan  
Eu eur goulen : Pe-leac'h e man va vamm ?

Dan hospital e voe douguet  
En trista stat ma afech da velet,  
Un tu a nezan grillet gant an tan  
Hac e galon mantret gant ar boan.

Diou verc'h e devoa ho servichi  
Pa voa annoncet dezo ar malheur cri,  
Ma Lavare an eil hac e ben anezo :  
Me garfe vent o vont d an douar ganto.

A-dalecq an eür eus a vrema  
Betec an eur diveza,  
Pa teuyo d'in sonch eus o maro,  
Va daoulagad a ranc seuyilha daëro.

Ho æsquernigou a zo dastumet  
Nemet ar re zo bet luduet  
Lorquet e zint ho fevar er memes goëst  
Ha casset dar veret assembles.

Eur pobt dud a voa en ho enterramand,  
Qen baure'hissyen qen payzand ;  
Ho c'halono tout a sesye  
Hac an dour gant ho diou jod a rede.

Me ho suppli, ô va Jesus !  
D'ober outo eur zel truëuz ;  
Prezervit a nezo eus tan ar purgatoar  
Pa zint devet e beo var an douar.

An nep zo bed quiriecq  
Eus ar malheur a zo erruet  
A voa cousquet er marchosi  
Pa zeuas an tan den difuni.

Sortyet e bet e secret  
Pes a zo caus ma ze punisset,  
E lec'h beza dibunet tud an ty  
A ranc ober e c'hun n e sorty.

Avoalc'h em beus deoc'h lavaret  
Evit ar blijadur o peus bet eus ma c'hlevet ;  
Monet a ran da finissa  
Dre eur maleur ar c'hruella.

An deiz var lerc'h, e parres Plomeur,  
A zo erruet ar memes maleur  
Gant eun den privet a sclerigen ;  
Silaouet tout gytibunen.

Renan Caoudal en e vele  
A goeze an tan var en e horre,  
Hac evit soujal en em sicour  
E tiredas da doull an nor.

Allas ! an or a voa alc'hoët  
Sortial er mes ne alle quet,  
Bale e lec'h mar care dre an ty,  
An tan a voa bepret eus en devi.

En toul an nor e ma bet conet,  
Hac eno e zeo bet chomet,  
Ha pa voar d'ût da z'evêl anezan  
E couêze e entrailou deontan.

E æsquern a zo bet destomet  
Nemed eur vrec'h dezan ne quit bet civet ;

Ponnes zo bet laduet quicq hac æsquern,  
Oh ! crissa maro eta, christenien.

Ceto eur meleour aman ;  
Ma breur, ma c'hoar, sellomp ennan,  
Da lart'ar ; redoublomp hor pedennou  
Ma pellaï diouzomp ar goal blanedennou.

Quement a glevo ar guers-man  
A d'effe lavaret da neubudtan  
Beñ a Bater a peb a Avez  
E delivrançz deus ho enez.

O va Jezuz ! me o suppli,  
Bezot eta truhez ouzomuy  
Recevet ar hacomp en ho g'oar  
Pa ezaïmp quit divar an douar.

5 bis 22 **RECIT**

*Composet a nevez var sujet ar Maleurus an eus tennet var ar Crucifi,  
en departamant a l'Oorn.*

VAR UN TON TRIST.

BRETONET, me ho suppli, tostait da g'levet  
Ur recit deus un exempl a nevez arruet,  
Mar he madeles Doue rei din ar sclerigen,  
Emeus c hoant da disclerian en toutes ar gristenien.

Un den a religion a g'levo quement-ma,  
E oat hac e oazion a deñion da grena :  
Ma unan eo troublet ma speret en autier  
O clasq dibab er façoun da rei da intent scler.

En heisv't devez voar nugen a vis g'uelen,  
Er blaves c'huec'h var nugen, e h' laouet, cristenien,  
E voa en daou den maleurus gant an hent e vonet  
Evit ober ur veach o devoa prometel.

Unan deus an daou den ma a voa ur chasseur,  
Hac a brai an droit chase da vale e gartier,  
Hac a dougue e fusilh partout elec'h ma hai  
Dre ma voa bet surpr'entet c'hoar gantar tonet goue.

Hac o tonet da dremen ur c'huvar a nevez  
Savet en tal ur veret en fin ur jub le,  
Hac a doug ar figouriou demeur ar Bassion  
En eus souff' Uon Salver da beñon rançon.

Unan a nes a dennas e doc divar en den  
Eait ober e dever eyet ar gristenien,  
Da salodi ar Salver santel a binguet  
Abalamour den imach a voel erchieffet.

Distraï res ar maleurus pa voeles quement-ma :  
Dre ur gos injurius a c'hou ennas ounian :  
Da betra tenes da doc, eme, d'n ingrat,  
Te sonch dit bea salvet o salodi eun tam coat ?

— Guellet a ran dirason da vestr a ma hini  
Laquet dre hon lec'heju elais er troc'h,  
Ha pe deñio dou gurel vo rei appari'an  
A rentan cont dar barner pa soñjomp nebutan.

— Arret a me discoueu dit en un iostant  
A pe fel did lavaret eo eren a puissant,  
Brassoc'h mestr e hon evitan pa man er crucifi,  
Me he disqueuno d'an douar hep douet d'e bidi.

Sevel e ra e fusilh hac eneus-an tenaet  
Voar en imach adorabl eus ar Christ binguet,  
Ha dre an toul en eus gret e stringas er goat  
Quen e he bet abinet bijas ar miserabl.

Dre ar boize deus an torfel e deus bet cometet  
E tiores an douar hac en eneus-an lonquet  
Dre bermission Doue betec e diou gaset  
Ma voe rentet en ur stat pitoyabl a cruel.

E gamarat pa velas quement-ma  
A dap croc en e divrec'h evit essa e denna  
Misericord e crias a ma voa estonet  
Ha ma c'hes d'ar pre-byter evet un den egaret.

Supplia a ra ar c'hure da dont gant'an ent  
Hac e tenont assambles d' vitian un exempl ;  
Fatiqen ra ar betec pa o deus guellet ar goat  
O toud deus ar crucifi eus an den miserabl.

Er spaç deus a bemp devez eo bet er plaç-ze :  
Na neus den evit compren ar poanion a souffre  
Dre bermission Doue dat'het en e brison  
Qua a deu an autrou'n Escop hac e procession.

Ar c'hure, an den-ma a bartias en quer  
D'ober declaration en ur memes auser  
Dirac en autrou'n Escop hac an oll sojedet,  
Hac o leon a jesteri e voan oll estonet.

Ar sul vintin e pigns an autrou'n Escop  
Er gator a guirionezevit avertissan ar bobl  
Da donet de accompi gant e procession,  
Ma teugent d'ar plaç santel gant gure devotion.

Pa voa ar bobl d'an daoulla dirac ar groas santel  
Dre bermission Doue e aparisses daou Ed,  
A gante pobl a veavec da doulan an d'uar  
Evit rei e liberte d'ar paour quer criminal.

Douguet eo d'an itis d'assistan en oferen  
A c'eb bre an Escop hac e oll veleyen  
Da drugarec't Doue hac on man binguet  
Deus ur c'hraç quen admirabl o deus dezi accordel.

A c'hane a voa transportet gant e van hac e dat  
Da findissa e vuez en eur stad pitoyabl  
Mut, bouzard hac innoçant a rent erisely  
Hep gattoud en em zicour a hmi mui quiny.

Pevar devez var nugen eo bet en e voele  
O souffre poan a pinigen quen rentan e ene ;  
Goulennomp oll a gaton ma vezo recevet  
Gant Jesus hac ar Ver'ebes e pales an Dreindet.

An den-ma a oa oaguet deus ur bla var nugen,  
A barres Sant-Yau ar C'hoat, evit rei da entent,  
En departamant a l'Oorn : selaoet, christenien,  
Un exempl considerabl a spontus da gompuen.

Lanhuon, en ti intanvez Ar Goffic, mouler-levrier.